

CANTIC

MISSIONN PAROS PLUZUNET

Er bla 1863. (Fidèle par le P. L. Forestier. 27.)

Var don Canaouën Cloarec Paimpol.

Benedictus Dominus Deus Israël, quia visitavit et fecit redemptionem plebis suæ. — Cant. Zach. — Saint Luc, ch. I.

Meulet ra vo bepred tri ferson an Drindet,
Ar Sent hac an Elez, ar Verc'hes viniguet,
Da veza deurveet donet da visita
Popl paros Pluzunet en defou santel-ma!

Carante hon C'hrouer 'vidomp so meurbed bras,
Rac lésel 'ra he Vap da vervel var ar groas,
Vit prena hon ine dre ar briz deus he voad,
Gant ar c'hoant a neveys da dont d'hon sovetaat.

Ny, bugale Adam, leun a sempladurez,
O pec'hi a abus demeus he vadelez;
'Lec'h dont da rei deza plaç quenta hon c'halon,
Pa memp bet diganta pep tra en donéson.

Daoust d'hon ingrateri a clasq hon pardouni.
Mar memp bet ar goal-eur, siouaz! d'hen offansi!
Offr a ra demp bemde cals deus a remejou
So capabl da vuellaat an donna gouliou.

Ous eur voüez quen tener na vezomp mui bouzar
Distroomp a fe vad var zu Mene Calvar :
Pellaomp deus an droug ha heuliomp al lesenn
Disquet gant hon Salver er bed d'ar G'hristenien.

He Vinistred, hirye, evit hon avantaich.
A guelenn ac'hanomp dre ar memes langaich.
Vel ar buguel prodicq, deut, émeze, d'ho bro;
Rac ar guir blijadur a so hebquen eno.

Evel gant Jeremi Jerusalem galvet,
Demeus eur c'houstq marvel difuni so dleet!
A dra sur, mar sentomp, eun diluch a c'hraçou
Da netaat hon ine varnomp a disquenno.

Pa ve bet ar pec'her pell en laçou Satan,
O terri he chadenn a neve eur goal boan :
Gant dic'houde a tostaa ous ar govezion
Nemed en eur retred pe en eur missionn.

Maes chetu an amser a eur-vad, a druez ;
Redomp, evel ar c'harv, d'ar feunteun a vuez :
E pad pemzec de grenn a'vo digor an or
Deus ar Visericord ; preciusa tensor !

Ia ! daou artisan caër demeus an Aviel,
Pere a so ganet ebars an Breiz-Isel,
A deu da labourat gant acqued en hon toüez :
Guelet vo ho c'houraich prestic o douguen froüez.

Arrivout 'ra eta an Tad mad Forestier
Hac he vreur Coniat a so en he guever :
Devet int gant an tan a garante Doue,
Vit procuri he c'hloar ha salvi hon ine.

Guir vignoumed Jesus a goumanç pesqueta ;
Dont a ra d'ho sicour ar Veleyen nessa :
Bars ar sizun guenta a so var dro ugent,
Hac én eil a n'hém gav ive tost da guemend.

Comz ar brezeguerien a vesq mor bras ar bed ;
Guelet 'rer ho rouëjou deus a bep tu carguet ;
Ar barosianed a hast e n'hém renta ;
An diavezourien a deu d'ho imita.

Nep ho chelaou er-fad so red deze compren
Vit petra eo lacquet var an douar an den ;
Petra dle da ober, petra da dilésel,
Mar fell deza cavet lod er joa eternal.

Querquent ha peder heur a son an *Angelus*,
Vit dont da saludi ar Vere'hes glorius ;
Hac, adalec pemp heur, d'ho zro, ar Veleyen
A dalc'h da celebri myster an oféren.

Maes quentoc'h, a-liès, so rencquet digueri
An templ santel d'ar bopl, vit antren da bidi :
A veichou da div heur, bete da hanter nos,
Hep distera disurz, mui vit er barados.

Da seiz a ve ive oféren brincipal
Ha, dious-tu, a creguer er pedennou rac-dal :

N'hem unani a ra neuse an oll mouëziou
Da gana canticou hac ar gourc'hemmenou.

A bep cøstez a so près ha devoccion;
Leun a ve an ilis; bras an attancion;
Da seiz heur deus an nos ve c'hoas *penitanted*
Er c'hovezionnou o disclery ho fec'hed.

Ar Vissionnerien, pep a diou veich bemde,
A deu da explicqua scler-mad ar vuirione;
Gant nerz ar Speret-Glan, hep mar, int inspiret :
Ar c'halounou yena en instant so tommet.

Eun hanter leo vian deus a yourg Pluzunet
A so eur chapel vrag da Vari dediet :
Gant fe, an eilvet Sul demeus ar missionn,
Ve querc'het he imaich bars an prozecion.

Er c'hœur a so savet eun tron caër hac huel
Dirag an auter vras evit ar Vamm santel :
Ac'hane a n'hem blich o recev hon hommaich
Hac ho distribui an nerzussa couraich.

Piou benac a neveys epad eiz de heuliet
An oll exercissou a so bet absolvet;
Dont a ra d'ar Sañorn c'hoas da gommunia :
D'ar Sul vit an anaoun e ra ar memes tra.

D'ar Sañorn ve, ouspenn, biniguet ar c'hroajou,
An habichou bian hac ar chapeledou;
Neuse a so da choas deus a beder breuriez :
Ar bautred a ell mont en-he oll assablès.

Nicun na oa da ze. evit guir obliget;
Maes gant contantamand eo bet an dud guelet
O diredec a leiz evit n'hem arrolli :
Couls ez eo lavaret n'en deus manquet hini.

Ar Sul eiz a C'huevrer mil eiz cant tri ugent
Ha tri, a-boë m'eo deut ar C'hrist, patromm ar Sent,
So bet fin d'an termen favorapl accordet
Vit obteni pardoun deus ar brassa pec'hed.

Douguen a rer d'al Loc Rouanès an Envou;
Clevet a ve var dro trous al letaniou
A ganer dre an hend evit he enori,
Rac er c'huëroan anquen a deu d'hon c'honsoli.

Maes brema eo red chomm eun nebeud, Mamm dener,
Da adori hon Mestr, hon Salver, ho Map quer.
An Autrou Forestier a vinig ar C'halvar
Var bini eo digor diou vrec'h Roue ar gloar.

Penos rei da gompren peguen touchant sarmonn
A ra an Tad Coniat var groas ar missiönn?
An oll azystanted a deu da hirvoudi
Ha da voëla dourecq o clevet anezi!

Quen a vezo, Sin sacr deus hon Silvidiguez!
Poënt eo demp cass d'ar guer hon guir avocadès.
Supliomp anezi da divoall hon ine
Ous ar peichou stignet a beurz an droug Elez.

Distroomp var hon guiz hep paouez da gana :
« *Salud, Stereden Vor! Ave, Maris Stella!* »
Er Venediccion vo goude azistet
Ha, dre an *Te Deum*, grac da Doue rentet!

Arri eo ar moumend demeus an disparti.
Souden bars an ilis vo difroneq, goël ha cri!....
An Tad bras a guiniad deus an devez fidel,
Hac an Autrou Person deus an Tadou santel!

Mar so etal ar groas bet squilhet forz daëlou,
Ama eo bruzunet, certen, ar c'halounou,
A bere birviquen na vezo effacet
Mouëz an Tad Forestier nac an Autrou Bouget!

Miromp ar c'hentelliou a deveus demp roet;
Requedtemp, vit ho foan, ma vo recompanset
Hy ha quemend belecq a so deut d'ho sicour
Da drailha liammou Satan, hon adversour.

Trugare, enor dec'h, Pastoret Pluzunet!
Paour, pinvic, beo na marv na so bet ancoueet!
Me garre a chomfemp brema var an hend mad,
Vit scleria en tu déou en traouyen Josaphat!